

**Ar belei(e)n harluet. (1)**

War ton Communion ar vugale

O ma Doue pa deuan da sonjal  
 Me sant va c'halon e straql  
 Ag e dont da gonsideri  
 Ar malheur a zo oc'h or pressi

Me vel e nem den deus or c'hreïs  
 Ar gwir sklerijen deus ar Feïs  
 Squis e Doue oc'h or goëlet  
 Pa na renonsomp d'or pec'het

Kaër an deus dont d'ar gervel  
 Ne reomp seblant wid e c'hlevet  
 Ag o skoïo a dra certen  
 Meurbet terrubl gant he walen

Brassa malheur a c'heruffe  
 Eo an abandon a Zoue  
 Tarc'homp mad et ta d'or lezen  
 A greomp timad gwir pinijen.

En em adressomp d'ar Ver'hez  
 Pini eo ar gwir advocadez  
 D'ar bec'herien abandonnet  
 Etre daouar(n) chimatiket

Doue a zeu en amser ma  
 Eus e vinistret d'or priva  
 Be on eus se sur meritet  
 O vesa ounta ken direspet

Squis int pelloc'h o redet  
 er c'hoajou noz deïs eb kousket  
 Souffret o deus naon a riou  
 An douar ien evit gueleou

Evel int ous ar gaouen  
 A gus en deïs e nos a bourmen  
 Preserviti an evel laboucet  
 Allas ar gues a renq cuset

Pel so emeïnt e miser  
 Palamour deomni va Salver  
 Or punissit o va Doue  
 A do peleiñ liberte

Ne deo ket-hi o deus meritet  
 Beza er c'his se chatiet  
 Allas ni a so criminal  
 En dallentes meurbet fatal

Sonjet o deus ivit o repos  
 En em denna e bro Saos,  
 Alies o deus bet clevet  
 E vije ar feiñ dezo rentet

Va daoulagat a scuil daelou  
 Va c'halon a bouth huanadou  
 Plijet ennoc'h va Doue  
 O ped truez oc'h on ene

Adieu eta or Beleïen,  
 Marteze no guellimp biquen  
 Mervel a rankimp evel loanet  
 Eb sakramant na sicour ebet

Guel e ganeomp certenammant  
 Mervel eb reçeo sakramant  
 Evid na deo beza souillet  
 Dre saouarn an keretiket

Kris e vije ar galon na vouelje  
 E treiñ an Aber neb a vije  
 O velet ministret Jesus  
 Taolet var er mor perillus

Kunduit al lestric se va Doue  
 A liquint-en e savete  
 Beza ezint o gwir disquibien  
 Preserviti dre o moyen

Adieu eta guir bastoret  
 Ni zo eta abandonnet  
 Etre grifou bleizi mechant

**Privet a beb soulajamant**

Ma vijen eno var garrec  
 Doue en divije va exaocet  
 Crial a rajen certanamant  
 Ma saje an encleo d'ar firmamant

Ia va Doue ni oc'h eullio  
 A var o le(r)c'h ni a griou  
 Importun evel ar gananèen  
 Quen a rot deomp or beleïen

Ar veleïen ive do zro  
 A zisques o glac'har c'huero  
 Merquet eo var o bizachou  
 E scuillont cals eus a zaelou

Adieu pobl queïs eus a Leon  
 Quitaat a rankomp or c'hanton  
 Adieu kerent a mignonet  
 Adieu d'or guir penitantet

Lezet on eus ganeoc'h armou  
 Evit souten och eneou ;  
 Diouallit mad eta pobl queïs  
 A dalc'hit mad atao d'ar feïs

O va Doue pebes arret  
 Or beleïen a renq tec'het  
 Ni non eus mui d'or souten  
 Nemet o kras va Salver ebquen

Ar gatelet(2) eus va c'haloun  
 An disprisanç eus ar gracou  
 E Doue quement outrajet  
 Ma zeo ouzomp en em fachet

Pardon va Doue va Jesus  
 Bezit ouzomp trugaresus  
 C'hui a zo deom-ni e(u)n tad mad  
 En oc'h andret ni so ingrat

O ministret eus on Doue  
 Pevit evidomp nos a dée,  
 Ma tuimp d'en eur amanti  
 O tec'het diout an heresi

O guerc'hes Vari on itroun  
 Sellit out on dezolation  
 Sellit a drues oud ar Franç  
 A roït deomp oc'h assistanç

Na brema petra da ober  
 Ni non eus mui ar pouer  
 Da ober en public pedennou  
 Pe brest e zaïmp d'ar prisonniou

Decretet eo gant an nation  
 Eo criminal an devotion :  
 E cus evel ar gaouen  
 E rencomp ober or peden

Peleac'h e zaïmp-ni da bedi  
 En ilis n'ellomp antren mui  
 E c'hars ar groas da viana  
 Gant ar vadalen da vouela

Evel ar benitantet guechal  
 E c'hars an doriou o crial  
 Eb gallout en ilis antren  
 Nemet goude guir binijen

Brema e zoump ive condaonet  
 Da vouela dourec d'or pec'het  
 Biouen ne antreomp en ilisou  
 Ma na renonçomp d'or c'hrimou

Pe gueit va Doue a amzer  
 E tilessot-hu ar pec'her  
 dizec'ha a reomp evel ar foën  
 Ma na zuit pelloc'h d'or souten

Grit ma vezò retablisset  
 Ar Jerusalem distruijet  
 Ma c'hellimp antren en ilisou

**Da gana deoc'h meuleudiou**

**Doue vezō meulet,  
Hag an anaoun pardonnet.**

Fait par M. Le Borgne, mort vicaire de  
Cléder. Copié sur le manuscrit original,  
appartenant à Pierre Le Borgne, son ne-  
veu. Taulé, 5 mars 1851.

(1) *Pas de titre ; ce titre est celui qui se trouve à la table dressée par Penguern.*

(2) *Ms : gatelet ; lire : galetet.*